

Prizioù rannvroel dazont ar brezhoneg

Loreidi 2006

1. Rummad « hiniennoù »

Trede priz : **Aurélie LE BRUN**

Daoust m'eo bet ar galleg he yezh-vamm, dre m'eo bet ganet e Kemper, he deus Aurélie Le Brun klevet brezhoneg a-viskoazh. War-dro 14 vloaz ez eo bet dedennet gant ar vombard ha kroget he deus da seniñ. Un dra bennak a vanke avat : yezh he bro hag he familh. Dre ma kemere muioc'h-mui perzh er vuhez sevenadurel ez eo deuet da vezañ brasoc'h-brasañ ar c'hoant da adkavout ar brezhoneg. E Roazhon eo ez eo deuet ar c'hoant-se da wir goude bezañ tremenet dre an emglev-bro Skeudenn Bro-Roazhon hag ur post nevez m'emañ atav o labourat warnañ e Kuzul Sevenadurel Breizh. E dibenn miz Gwengolo 2004 ne ouie Aurélie ger brezhoneg ebet. E miz Gwengolo 2005 e oa gouest da labourat e brezhoneg. Kement-se a ziskouez d'an holl ez eus tu, hiziv an deiz, da zeskiñ brezhoneg buan, ha pa vefe e Roazhon. Ur brouenn a gement-se eo Aurélie.

Eil priz : **Mikael BODLORE**

War zeskiñ emañ c'hoazh Mikael Bodlore. Evel m'emaomp-ni holl ivez a-benn ar fin, mod pe vod. War zeskiñ ya sur, met ne vir ket outañ a vezañ oberiant. Divizet en deus lakaat e varregezh war an urzhiataerezh e servij ar brezhoneg : e-touez ar pezh a zo bet kaset da benn gantañ e c'haller menegiñ al lec'hienn geobreizh (www.geobreizh.com), ul lec'hienn a c'heller mont drezi e brezhoneg koulz hag e galleg hag a ginnig en un doare plijus-tre kement tra a denn da zouaroniezh Breizh. Talvoudus-kenañ eo al lec'hienn-se d'ar skolioù divyezhek da skouer. Savet en deus ivez lec'hienn Radio Kerne hag ul lec'hienn all evit kas war-raok mennozh ur pik BZH evit ar chomlec'hioù postel.

Priz kentañ : **Katell CHANTREAU**

Bet ganet er Val de Marne, Katell Chantreau a oa erruet e Breizh e 1995 d'ober he studioù. Buan e lakaas he anv da heuliañ kentelioù Istor Breizh ha kentelioù brezhoneg. Dispar e oa ar c'helenner brezhoneg ha deuet e oa da vezañ sot gant ar yezh-se, kement ha ken bihan ma'z eas betek tapout ur vestroniezh war ar brezhoneg. Ur yezh familh, labour ha krouiñ eo ar brezhoneg eviti hiziv an deiz. E brezhoneg e tesav he merc'h. En he buhez micher e vez kenurzhiat ganti raktres diorren an dudi e brezhoneg evit ar re yaouank e framm an UBAPAR. Ren a raio, da skouer, ar greizenn vakañsoù kentañ e brezhoneg e Breizh-Uhel, e bro Redon, en hañv o tont. Hag a-hend-all emañ o paouez lakaat dont er-maez, gant an ti-embann l'*Oeil Electrique*, *Caminante*, *danevelloù eus an Andoù*, levr divyezhek a laka ac'hanomp d'he heuliañ dre 3 bro eus Su-Amerika : Ecuador, Perou ha Bolivia.

2. Rummad kevredigezhioù

Trede priz : **SETU**

E Lise Diwan Karaez e oa ganet pep tra. Da heul kentelioù kleweled e oa deuet c'hoant d'ur strollad liseidi mont un tamm pelloc'h. Evit-se e oa bet savet ar gevredigezh Setu. Kavout a ra dezho « e vank traoù evit ar re yaouank e Breizh, ha n'eo ket en ur c'hortoz ez aio war wellaat an traoù ». Krouet eo bet SETU dre youl ur strollad mignoned eta evit gwellaat, sikour, skignañ ha lakaat da vont war-raok ar c'hleweled e brezhoneg.

Tri film berr zo bet kaset da benn ganto betek-henn : : ar Wenanenn, Piv ? hag ur film da ginnig Lise Diwan. Gant ar fiziañs o tont enno e teu ivez ar raktresoù, ha kalz a draoù zo da zont en amzer da zont. E-touez ar raktresoù e c'heller menegiñ un abadenn geleier faltazi a vefe skignet war Tele Kreiz Breizh e 2010 ha, piv 'oar da heul, ur film hir.

Eil priz : **STUR**

Ur yezh a chom er-maez eus bed an urzhiataerezh a dap un dale spontus, un dale hag a c'hallfe kas anezhi da get. Evit lakaat ar brezhoneg da vont tre er bed-se eo e kinnig ar gevredigezh STUR un toullad binvioù. Kalz a lec'hiennoù kenrouedad a zo bet savet gant STUR evit kregiñ. Meziantoù a zo bet savet ivez, evel un diafazier da skouer.

Stummadurioù e brezhoneg war an urzhiataerezh a vez kinniget bremañ gant ar gevredigezh. Krog eo ivez da labourat war ur raktres meur : ur meziant treiñ emgefre, hag a zo da zont e 2008. Kement ha lakaat ac'hanomp da basiantañ ez eus bet lakaet ur geriadur enlinenn gant STUR, gant skeudennoù ha titouroù a bep seurt diwar-benn ar yezh. M'ho peus c'hoant gouzout hiroc'h, kit buan da sellet ouzh al lec'hienn www.Geriadur.com.

Priz kentañ : **Centre Intercommunal d'Action Sociale du Cap Sizun**

Bet savet e 2005, Kreizenn Etrekumunel an Ober Sokial er C'hab a labour war div dachenn : an dud kozh hag an dud diaestaerioù ganto. Tri zi ar re gozh a vez meret gant ar Greizenn Etrekumunel. Kaset ez eus bet ur raktres da benn ganti evit stummañ an dud o labourat en tiez war ar brezhoneg ha war an ober gantañ dreist-holl, war ar pemdez. E kenlabour gant ar gevredigezh Mervent eo bet graet al labour. Roet en deus ar raktres tro d'ar c'hoskor, d'ar familhoù ha d'an dud kozh da eskemm da vat. Talvoudekaet eo bet ivez ar pezh a oar ar re gozh, o reiñ ar rol kentañ dezho. Diwar-se ez eus bet krouet darempredoù gwelloc'h etre an holl. Lakaet eo bet an holl d'en em santout gwelloc'h a-drugarez d'ar brezhoneg.

3. Rummad embregerezhioù

Trade priz : **France 3 Ouest pour l'émission TE HA ME**

Pal pennañ « Te ha Me » a zo tizhout sellerien nevez, diskouez brezhonegerien yaouank e-ser un eskemm berr gant goulennoù a bep seurt a denn d'o buhez, d'o studioù, micher, c'hoantoù, dudi...

Diskouez ur yaouankiz o vrezhonegañ a zo reiñ ur skeudenn yael eus ar yezh, reiñ da c'houzout ez eo bev hag ez emdro gant hec'h amzer hag ar gevredigezh a vremañ.

Pediñ tud yaouank a bep korn a Vreizh a zo komz d'an holl rummadoù oad, reiñ da c'houzout en un doare fetis ha gwirion emañ ivez ar re yaouank o plediñ hag o vevañ gant ar yezh, hag ez implijont anezhi en o stumm, en ur vezañ emskiantek o deus da zeskiñ ha da wellaat o yezh evel-just, met gellout a reont ivez reiñ tro ha blaz d'o c'homzoù ha spi zo ne vo ket klevet kement ken ar randon ken anavezet « N'eo ket memes brezhoneg ».

55 abadenn 8 munutenn zo bet enrollet betek-henn. Abaoe miz Here 2004 ez eus bet sellerien stank o reiñ da c'houzout e oant plijet gant an abadennig-mañ : un emgav eo evit ar re yaouank hag ar rummadoù koshoc'h a zo laouen oc'h ober anaouedegezh gant yaouankizoù ar vro.

Eil priz : **SUPER U Gwern-ar-Sec'h**

Ur gourmarc'had ennañ panelloù divyezhek ? Ur pennad zo ez eus eus an dra-se. Re wir. Peurliesañ avat ne vez kinniget nemet un nebeud panelloù ha n'eo ket pep tra lakaet en div yezh penn-da-benn.

Jean-Jacques Troadeg, e penn Super U Gwern-ar-Sec'h a zo bet e-touez sinerien gentañ an emglev Ya d'ar brezhoneg. Pa oa kreizenn genwerzh nevez Traoñ Orson da zigeriñ en deus kavet an tu da lakaat an emglev da dalvezout. Ur plas eus ar c'hentañ zo bet roet d'ar brezhoneg : kement meneg zo e diabarzh ar stal zo bet lakaet e brezhoneg. Ken gwir all eo evit ar menegoù a gaver en diavaez, eus ar parklec'h betek ar pozh-servij eoul-maen. War an tikedoù-kef e c'heller lenn brezhoneg evel war paper lizher ar stal. Ha tra nevez da vat ar stal eo ar mekanik da dennañ poltredoù. Evit ar wech kentañ e Breizh e c'helloc'h klevet ur vouezh o komz deoc'h e brezhoneg e seurt mekanik.

Gant Jean-Jacques Troadeg e vez diskouezet an hent da holl sinerien Ya d'ar Brezhoneg. Diskouez a ra splann ez eus tu da reiñ e blas da vat d'ar brezhoneg er stalioù bras, e pep lec'h e Breizh.

Priz kentañ : **Alato SARL**

Un embregerezh yaouank-flamm eo Alato, savet e miz Gwengolo 2005 gant daou vignon a bell zo : Brieg Olivier et Owen Poho. O youl hag o hunvreoù zo er raktres-se. An traoù pemdez o deus choazet labourat warno, al listri, an daol hag an ti.

Ar mod-se da werzhañ gwerennoù, asiedoù, skudelloù... a zo evito un doare da zerc'hel ar yezh, tomm da galon ar Vretoned. Un anv brezhonek zo bet roet d'an embregerezh « Alato , dizagn ar vro » ha d'ar produioù, gant an daou zastumad « Sivi » hag « Erminig » da skouer.

Gant ar brezhoneg e ra an embregerezh war ar pemdez. Kement plegfollenn pe follenn vrudañ a vez embannet a vez kavet brezhoneg warno. Gwelloc'h c'hoazh, brezhoneg zo ivez war ar fakturennoù, hag an teulioù melestradurel. Ha brezhoneg dezhi ivez gant ar pratikoù brezhoneger.

Krouiñ ha gwriennañ a vez lakaet da vont asambles gant Alato.